

*Son Nevez  
var eun Danvez koz*

The musical score consists of six staves of music in common time, treble clef, and a key signature of one flat. The lyrics are written below each staff:

- Me am euz eur ves - tie - zih en
- Ten. an - roz Me am euz eur ves.
- tie. zih en Ten. an . roz hag
- e re dinn d'hi gwe.let hep mui go-
- toz , hag e re dinn d'hi gwe.let di-
- sul dan noz

Me am euz euz eur'vestrezik en Penanroz (diou wech)  
Hag a redinn d'hi gwelet hep mui gortoz,  
Hag a redinn' d'hi gwelet disul d'an noz.

Ha mar teuez d'am gwelet va c'hloarek koant (d.w.)  
Me 'nem droïo en eur pesk er ster arc'hant  
Ne pezo ket va c'haloun hervez da c'hoant.

Mar 'n em droëz en eur pesk 'vel ma lârez (d. w.)  
Me vezo pesketaër, o va mestrez !  
Me besketo va Dousik dre garantez.

Mar teuez d'am fesketa, ha dam spouroun (d. w.)  
Me 'nem droïo en heïez er c'hoajou doun  
Ne pezo tam, kloaregig euz va c'haloun.

Mar 'n droëz en heïz, 'vel ma larez (d. w.)  
Me a vezo chasseour, o va mestrez !  
Me chasseo va Dousig dre garantez.

Mar teuez d'am chasseal, 'riskl d'am müntri (d. w.)  
Me 'n em raïo leanez 'n eun abbati,  
Ne pezo ket va c'haloun, o kloarek kri !

Mar 'n em reëz leanez, 'vel ma larez (d. w.)  
Me a iëlo da vanach o va mestrez !  
Me govesso va Dousig dre garantez.

Ha mar teuez d'am c'honez, oueli c'houero (d. w.)  
Gwen-kan maro em gwele te am c'havo  
Roïn ket d'it va c'halon ker a pezo.

Mar da gayan gwen-maro 'n da wele kloz (d. w.)  
Plas Sant Pêr a gemerinn er Barados .  
D'en digerri d'am Dousig euz Penanroz.

CHARLES LE BRAS.